

## Fañch an Uhel

### Kanom meulodi Breiz-Izel

Serret on-eus dorn peb mignon,  
Ha lavaret a-greiz kalon :  
« Demad dit, breur ker, ha yhed,  
Ha bezom bepred mignoned !

On gwad an eil euz egile  
‘Zo en em dommet, ‘vel bugale.  
Eur vamm a deu da ‘n em gavoud  
En pell-bro, da ‘n em anaoud.

Debret on-eus, ivez evet,  
Euz taol ar Barz ker azezet,  
Douget yhed on tadou koz  
‘Zo gand Doue ‘n e Varadoz.

Komzet on-eus euz ar vro ger,  
Meulet, kanet a beb amzer,  
Dresit an oll vroiou benniget,  
Gand Doue hg ar Barz karet ;

Klasket on-eus petra ‘ve mad  
Da ober bremañ, ‘vid lakaad  
On yez kaer en nerz, en enor,  
En pep kêr, en pep korn Arvor.

Bremañ, kanom, ‘vel on tadou,  
En amzer goz ar burzudou,  
Kanom gwerziou, kanom soniou,  
Hag unanom oll on moueziou ;

Kanom meulodi Breiz-Izel,  
Larom kevred a vouez uhel :  
« O ! Breiz-Izel ; o ! kaerra bro  
Koad en he hreiz ha mor tro-dro ! »

Brizeug, ar Barz e vleo melen,  
Mestr ar gwerziou, mestr an delenn,  
O ! mignon kêz, selaou ma mouez,  
Rag da spered ‘zo en on touez.

O ! gra ma vezim unanet  
‘Vid karoud Breiz-Izel bepred,  
Ha miroud on yez koz, ganet  
Leh ma sav an heol benniget !

Ya, breudeur, lezom oll unan,

Ha na reom ket kalz a van  
'Vid kleved eo prest da vervel  
Ar brezoneg en Breiz-Izel.

Gwerziou ar Varzed 'zo amañ  
A-benn mil vloaz, evel bremañ,  
En Breiz-Izel e vo kavet  
Hga e pep tu e vo kanet.

Kanom eta meulodi Breiz,  
Bro gaer ar Varzed hag ar Feiz,  
Kanom ar yez koz a garom,  
Hag oll a eur vouez, lavarom :

« O ! Brezoneg, yez venniget,  
Gand Doue d'on tadou roet,  
Te 'vo bepred ma harante'  
Te eo ar vro, al Liberte !

Ploured, en Koad ar Garamou, d'an 28 a viz Eost, 1869.